

Kantik da Zantez Theresa

TON : ~~Te Joseph celebrent.~~

DISKAN

Theresa, gwerc'hez pur, lilien ar C'harmel,
 Dirag ho skeuden goant ni a c'houl ho skoazel ;
 Roet da ~~Leskoed~~ ^{di ho hengelo} zikour ha sklerijen
 Da viret ar vuhe gristen.

1. Renet 'peuz er bed-man neubeud a vlavejou,
 Pleustret beteg ar penn hent bras ar vertuïou
 C'houi eo skouer ar glanded, burzud ar garante
 Etre Jezus hag an ine.
2. Bugelig, ho kalon oa goneet da vat
 Dindan zellou santel ho mam ger hag ho tad
 D'ho pellat ouz an drouk ha da greski bemde
 Ho santelez dirag Doue !
3. Eur vouez a poa klevet abred 'n ho iaouankis :
 Galv Doue da guitat madou ar bed iskis
 Warlerc'h ho c'hoarezed e vet eul léanez
 E diskeud Manati Karmes !
4. Henvel ouz ar rosen a digor he deliou
 Pa deu tomder an hanv, glizen ar beureou
 Bleuniou leun a c'houez vat a zivoan 'n ho kalon
 Jezus enhan a ra e dron !

5. Neuz ket rosen hep broud, gwir garante hep poan ;
Kreiz ho puhe kuzet ar pikou a zivoan
Gouzany a ret hep klem ; ar garante zo trec'h :
Stard man Jezus war ho tiouvrec'h.
6. Doue 'n euz kutuilhet timad ar Rosenig,
Klenket 'n e varadoz ine pur e verc'hig,
Breman tost d'he Zalver, evurus kreiz ar gloar
E teull bennos war an douar.
7. Pedet oc'h, Theresa, e pavar c'horn ar bed,
Dre oll ho madelez 'zo burzudus meurbed ;
War hon farroz ive teullet ar bokedou
Diseliet barz an Envou.
8. Jezus an eus sec'het ouz karante doujus
Kalz ouz e vugale a gas buhe mantrus
Tomet ar c'halonou ha kaset ar pec'her
Beteg kalon zakr hon Zalver.

B. L. Oyer
Imprimatur : *Cure doyen de*
S. Brieg, 16, 17, 28 *St Nicolas du Pédou*
H. TREHIU,
Vikel Vras.
